

6

D'ar vugale roit ar furnez,
D'ar iaouankis ar zantelez,
Ha d'ar gosni guir joaüsted,
D'an höll bennos hag eürusted. { bis.

7

Sikour ive d'ar bec'herien !
Roit d'ho spered ar sklerijen
Hag an domder d'ho c'halonou
Gant eol benniget ho krassou. { bis.

8

Lezit ar gliz-euz ho pennos
Da zisken varnomp deiz ha nos,
Ma zavo puil frouez an douar
Dindan eol tom ha glas bloaz. { bis.

Gant-alc'hoez aotr ho pedennou
Digorit deomp dor an envou,
Ha ui' gané deoc'h mill bennos
E kreiz dudi ar barados. { bis.

Quimper, le 6 Février.

IMPRIMATUR :

J. SERRE, Vic. Gén.


Landernau. — Desmoulins, Impr.-Libr.-Rel.

8N2-2-019

DA ZANT THIVIZIO

MEULEUDI HA PEDEN


Andante



Kanomp, Ka-nomp gant le-ve-nez Meu-leudi



Pa-tron ar bar-rez, Ha goulén nomp, dre ar be-



den, Eus he ven nos an a-lu zen, Ha goulén.



nomp, dre ar be-den, Eus he vennos an a-lu-zen.

2

E kichen Dol e zeo ganet
Ha Thivizio e voa hanvet ;
Var he gavel lagad Doue { bis.
A voa o para nos ha de.

3

Ar c'haera bugel tro-var-dro
A voa dizale Thivizio :
Lagadig glas ha bleo melen { bis.
Mouez eostik o kana laouen :

4

O kana laouen da Zoue
 Fors meuleudi a garante,
 En eur zional denvedigou { *bis.*
 Var letoun flour an torgennou

5

O velet ar bugel santel
 Gant spered lem, skiant huel,
 Arc'hescob Dol a lavare : { *bis.*
 Va bugel koant, deus ganen-me.

6

Mill bennos deoc'h, o va Otrou !
 Ha ken-avo, denvedigou !
 Ho tilezel e ran joaüs, { *bis.*
 Evit beza oll da Jesus.

7

A zivar neuze ar mesaer
 A ra bucn eur studi kaer ;
 Evit beza den a Ilis { *bis.*
 E ro bouked he iaouankis.

8

Beleg iaouank, meuledi deoc'h !
 Spered Doue a zo ganeoc'h ;
 Ho santelez a zo dispar, { *bis.*
 Eun El e zoc'h var an douar.

9

Gant ar veleien hag ar bob
 Choazet da veza Arc'hescob,
 C'houi a gasso d'ar peuri mad { *bis.*
 Denved Done, hor guella Tad.

0

Nag a draou kaer ha burzudus
 Gret ganeoc'h en hano Jesus,
 En eur brezeg, var douar Breiz, { *bis.*
 Lezen Doue d'an dud difeiz !

1

D'ar c'blanvour kez c'houi ho peus roet
 A bers Done nerz ha iec'hed,
 Ha d'ar maro eun eil vuez { *bis.*
 Dre eur beden a garantez.

2

Goude buez ken burzudus,
 Eur maro santel hag eürus
 A zigoras deoc'h, Thivizio, { *bis.*
 Ar barados evit ar

3

Gant an Ilis, hor Mam zantel,
 C'houi 'zo savet e renk huel
 E touez ar Zent hag an Elez, { *bis.*
 Gant kurunen ar zantelez.

4

Euz bar an env sellit brema
 Diouz he pugale o kana,
 O kana deoc'h meuleudiou { *bis.*
 Gant ho c'halon hag ho mouezion,

5

En hor parrez, dre ho pennos,
 Ra vevo feiz hon tadou koz !
 Hon diouallit diouz ar skuer fall { *bis.*
 A ra goasoc'h eget tan-goal.